

1

Gwerz Ermit Kroz Huet

179

1

Dreiste d'ar Koural Coat. Lion al loar e oa savet,
An amzer e oa spland, lugerni re ar stered.
Diwar kreichen Kroz Huet, d'an eur an hanter-noz,
Dimeuz kreis an douar a zaves eun den koz.

2

~~Spourset~~ Spournet e oan hag spontet, ma zreid e staj e hent,
Krenn e raen evel eun delienn, strakal e re ma dent.
Mez hen e larez d'in me "Feuz ket aon ma bugel
Gwechall me e veve war douar Breiz-Izel.

3

Epad ma bugaleaj an deved am meus messaet,
Alies gant gwell amzer Parc ar Mestr meus feget.
E dre dost d'ar Kroz Huet en bellajen Kerfouler
E oa ganet hag maget Pierez ar Porter

4

Ma feuz amzer mignon da tremen ganin me,
Dimeuz ma bro goz me gonto d'it an doare,
Pez am meus gwelet a tremen dirak ma diou lagad
Hag peza zo laret d'in gant ma mamm hag ma zad.

5

Moustier ar "Gommandirie" am meus gwelet serel
Gant an Toullad manac'het diredet diouz a bell,

2/ Brezelien courajus, soudardet manac'het,
Rikour Jerusalem hag he felirined
6

Dirvar stum an Orient e oa savet o mauster,
Diouz tier kaer ar vro. ze eo hennel o maner,
Coufflejou don hag ledan hag magoarion huel
E oa savet tro. var. dro da zifenn o c'hastell.

7

Ker santel Jerusalem, Rodez an enezen,
A deus bet difennet gant couraj eur c'hristen;
Mahomet deus combettet hag e holl Larrasined
Hag vvar ar chef Loulinan alies deus trec'het.

8

Gwelet an meus aneze vvar al lann a pourmenn,
Eur chapelet en o don, diouz o c'haste eur sabrenn;
War o gwis kamant, kroajou ruz a oa brodet,
Kentrion kaer hag lugermuz diouz o boton staget.

9

Mez allaz! red eo anzar: ebars en Breiz. Izel
Abred kaer deus ankoet o c'harg kaer hag santel,
Disket o deus deogi, truantal hag laerez,
Hag seri en o mauster an holl binvidigez.

10

An holl "vigon" en o c'halon hag an holl ~~rez~~ rez gante,
Stourm diouz ar vanac'het aman den a grede;

3/ Groage koant en o mouster alies deus kaset
Etre deiz o dimezi hag an deiz diouz o eured
11

Ar paour kaer divroiad ma felle d'ean donet
D'ar barouz Pont. Melvez da gemer eur fried,
Perzek real d'ar C'hommandeur roe an estranjour
Pe da lun Vask d'ar leure a lampe ebars an dour.

12

Breman etrezek kuz heol, grez eur sell ma lugel
Hag eno te e vrel eur menez govell huel,
E hono zo Kerpers, c'houi e lar "Menez Ceurnier,"
Duspenn dez les tro war dro ac'hane a veler.

13

Ceurnier e sav e ben dreiste d'ar Coat ar Beuffon
Hag dreiste d'ar Menez Bre', hag dreiste d'ar Coat-Lion;
Gurumbuel hag Coat-Forn, Menez bras Bestirien
Menez Vern hag Kroaz Thiet zo izel e gichen

14

War lein Menez Ceurnier, dre eurjou an noblanz,
Kreiz pevar biller a saver eur potanz,
Da grougo ar bobl izel hep justiz na lezen,
Mez bolonte an aotrou pe souz ar varkisen.

15

Plougomeriz eun deiz, freilhet gant an anken,
Eri den kaer a veler en fign diouz ar gorden:
Unan e verc'h d'an aotrou roje ket d'ar vatez,
Unan all a harze e vreg da zarapandi ar palaez;

Hag egile ma mignon, arask an deoger,
 Eur parkad kerc'h a serey gant avon diouz an amzer,
 O sonjal rei goude se e loden d'an Aotrou,
 Mez ar markis didrue e barnez d'ar maro.

Dindan lezen an aotrou ar gwallleurus payzan
 Netra n'helle kavet nemet miser hag poan,
 Dilhad rouz a oa difennet, gwisket e oa gant lien
 Botou koat renke kavet pe kerezat dierc'hen.

Aman, elec'h ma c'hilaouez, a zo d'in me kontet
 A dremenez gwechall eur marc'her kaer murlod,
 Duguesclin oa e han, mont a re da Pistien
 Da zistruji eur chastel : kemeret gant Zojen.

Adversour koz Breiz Izel, hon enebour "cruel",
 Diouz kastel Pistien a bille ar bobl izel,
 Ar Saoz treitour hag barbar ac'hane ne va sonjet
 Billad, laërez, distruji hag tana ar Veted

Mez ar Breton Duguesclin, moez ar varc'herien,
 Rikour Franz, enor Breiz hag revin ar Zojen,
 Prest e oa dilampet da gemer ar c'hastel
 Da zistruji ar murion hag an tourion hiel.

Hag aman, tost d'imp, hag diouz krap an dosen
 Dimeuz eur groaz "ancien" e veler ar zijen,
 Ma zad koz evit e feiz a neva hi savet
 Evit ma dalc'he sonj diouz an traou tremenet

22

War zijen ar groaz, e do diouz treid hon Zaluer,
 A lep tu plaset, diou "statue" blac'h a veler,
 Unan gant eur forc'h haerenn bannet evel an sabrenn
 A zifennez he bro diouz an enebourien,

23

Hag eben en he c'hoaz, krog en eur gegeliad lier
 O nean evit pean "rangon" kar Duguesclin
 Pehini a oa prisonnier en bro Spagnolet
 Lec'h ma oa aet da vrezeli evit e vignoned

24

Dreiste d'an dosen Coat Torn, ar vuerlaouene savet,
 An den koz diousta homan prin a remarkez,
 Hag kenkent en eur laret « Diouz ar vroman n'oun ken »
 Diouz dirak ma diou lagad e aez evel eur skeuden

Maurice Lalain